

(401, suite)

Chanson  
Var sujet Coler ar Graquez.

Var ton : Gueñez Cathel ar Tar.

(402) Ma c'hallen laqat va studi  
E meus c'hoant bras da gomposi,  
Discleria d'ar gompagnunez  
Ar goal humor eus ar graquez,  
Hac e clêfot ar scandalion  
A laqont en tieguezou.

Groaset ha Merc'het, me ho ped  
Bezit attantif d'am c'hlêvet:  
Allas! impossibl eo gouzout  
Humorion an oll Graquez tout,  
Rac caus int o-unan ractal  
Da lacat calz eus a scandal.

Hoguen, ar Graquez scandalus  
Ne vezont james diegus  
Da impetri en o speret  
Eun dra benac adreus bepret,  
Da gommandi en tieguez,  
Da scandalat an ozac'h qez.

(403) An neb o deus goal humorion  
Zo caus da galz a bec'hejou,  
Disput ha scandal, ha difi,  
Hac alies c'hoant da gregui:  
Pa vezont antreet en coler,  
Ne reont fors petra d'ober.

Nebeut a zo eus a voaset  
A ell soufr gant patiantet;  
N'ellont qet en em arretit

Na zeuont d'en em dransporti;  
Ha mar carvont loa-bod, penn-bag,  
Houp! ar vreg a red prest er meaz.

Ha mar tizont eun tol benac,  
Letu me cannet gant ar fallac;  
An den divergont ha brutal  
An sco evel eun aneval:  
Me glasqe tenna bleo e benn,  
Hac en deus friezet va jupen.

Ha c'houi a glêo amâ, Graquez,  
Penos oc'h caus da voal vuez;  
Me bed ar Merc'het da voellat,  
Hac ar voaset sot da furat,  
Ma vezint oll en carante  
Gant yec'het ha prosperite.

(404) An ozac'h mad, diouz ar mintin  
En em laqai var e z'goulin  
Evit ober e bedennou,  
Ar zervicherien var eun dro,  
Lommandi a rai gant calz reiz  
Derzo petra rint hed an reiz.

Pa vo an ozac'h sortiet,  
Ar zervicherien dijumet,  
Ar vreg a c'houlennno outo:  
Petra zo da ober hirio?  
Discleriet e vezo derzi  
Al labour a rai pepini.

328

Ne dit qet d'ober an dra-ze,  
Ennes zo atao Yan al Loue !  
Labour all a zo da ober,  
Hac a zo muioc'h necesser,  
Pa deuyo d'ar quër ni velo,  
Ha mar bez ret, ni rêsono.

Servicher ha servicherez  
Prest a responto d'o Mestrez ;  
Guelloc'h rijs demp' bea grêt,  
Rac aoun na vec'h-u scandalet.  
Ar Vreg a responto neurze : (405)  
N'eo qet hoc'h affer qementse.

Pa vezo êchu an devez,  
Prest da zebri coan assambles,  
Ar Mestr an ti a c'houlenno ;  
Labourer caër oc'h eus hirio ?  
Labourer aoualc'h hon eus grêt,  
Muioc'h calz eguet na z'onjet.

An Orzac'h paour en em glêmo,  
En coler bras ec'h antreo,  
Divarben nebeudic a dra :  
Scandal bras e vo qement-mâ ;  
Ar Vreg e clasq o excusi  
A zavo prest da rêsoni.

Graquez a zo, zo mechant bras,  
A fell sailla gant ar visach,  
Goal humorion, pennou calet ;  
Mar cretfent pilat o goaset,  
M'en assur gant eur penn squrien,  
E carfent digueri o fenn.

Goaset a zo a zo souffrant ; (406)  
Darn all a zo pront ha mechant ;  
Nebeut a vezo lavarret  
Na z'aint da blaç ar quereudic  
Da laqat ar varz da c'hoari,  
Ha laqat ober tro an ti.

Ar zervicherien o velet,  
Hac ar rugale sebezet,  
O velet ar goal exemplou,  
Abalamour d'ar scandalion,  
A laca Graquez hac erjec'h,  
Allas ! siouas, en meur a lec'h.

Mar carfet tec'hel ar goler,  
An daou bried bea ceder,  
Hac en em glêvet gant rêson,  
E ve entreze union,  
Ha var ar memes oriller  
E ve arranjet an affer.

(Vol. VII, p. 401-406.)  
strophes non numérotées.

[Cette pièce, publiée chez Lédan, sur feuille volante, ne comporte pas la dernière strophe.]